

CANTIC

EN HENOR

D'A ITRON-VARIA-CALLOT,

(E PARRÈS CARANTEC).

Var don *Cantic Santes Anna.*

VIRGO POTENS.

Mari, c'hui a zo galloudus
En Env ha var an douar ;
Rac-se, gant fizians, Mam Jesus,
Peb unan deoc'h a lavar :

DISCAN :

Gloar hac henor deoc'h da viken,
Itron-Varia-Callot ;
Selaouit bepret hor peden
Hac hor c'heticou devot.

Hon tud coz ganeoc'h sicouret,
Ervez lavar an histor ;
Guechall var ho inimiet
A c'hounezas ar victor. — Gloar, etc.

E bâr gour-Enezen Callot,
Leac'h m'a z'oa bet ar gombat,
E savjont eur chapel devot
Evit ho trugarecât. — Gloar, etc.

Abaoue neuse, Man dener,
Ouspen trizec kant vloas zo,
Oc'h eus roët e peb amzer
Assistans d'a Vreïz hor bro. — Gloar, etc.

Hac abaoue chapel Callot ,
A zioud ar môr bras savet,
Gant kalz pelerinet devot
A zo bet darempredet. — Gloar, etc.

Evel hon tud coz, ô Mari ,
Ni fell deomp ho servicha ,
Ho caret hac hoc'h henori
Ha deski d'an oll cana : — Gloar, etc.

Eus ho costez, Guerc'hes santel ,
Kendalc'hit da reï sicour
Deomp-ni, bugale Breïz-Izel ,
A-eneb peb adversour. — Gloar, etc.

Mari, c'hui zo gant guirionez
Galvet : Stereden ar môr;
Bezit d'hon tud en ho enkrez ,
Eur porz-sur ato digor. — Gloar, etc.

En distro eus ho beachou ,
Diouallet ganeoc'h, Mari ,
Devot , discabel , divoutou ,
E teuint amâ d'ho meoli. — Gloar, etc.

Al labourer var he dachen
A ra deoc'h mintio ha noz,
En eur labourat he beden,
Evit goulen ho pennoz. — Gloar, etc.

Selaouit he beden, Mari,
Binniguit he labourou;
Hac en ho chapel disoursi,
E cano meuleudiou. — Gloar, etc.

Selaouit, ô Guerc'hes santel,
Selaouit ar vam gristen :
Evit he buguel d'a c'henel
He c'halon zo en anken. — Gloar, etc.

P'a velo ganet he buguel
Gant levez e trido;
Hac heb dale pell d'ho chapel
D'ho meuli et tiredo. — Gloar, etc.

O finissa, Guerc'hes santel,
Ni raï c'hoas deoc'h eur beden :
D'an Iliz e rear ar brezel,
Hastit, hastit d'he difen. — Gloar, etc.

Bezit sclerijen ha skoazel
An hini a zo carguet
D'a c'houarn an Iliz santel,
Iliz ho Mab binniguet. — Gloar, etc.

Mari, refuch ar bec'herien,
Hon rentit krê ha nerzus,
A-eneb hoc'h adversourien
Hac adversourien Jesus. — Gloar; etc.

Grit m'a reno an union
Hac ar seïz ê Breiz-Izel,
Ha neuze gant devotion,
E canimp a vouez huel : — Gloar, etc.

Beza e z'eus, teïr gueach ar bloaz, induljan-sou plenier, evit kement hini, goude beza co-
vesseat ha communiet, a ia d'a visita chapel Callot, hac a ra eno eur beden ervez intantionou hon Tad sanctel ar Pap.

1° Da lun ar Pantecost;

2° Da lun an Dreindet;

3° D'ar sul varlere'h gouel Varia-Hanter-Eost.

— Ar belerinet a zo sûr da gaout eno confes-
sorel.

Imprimatur, 25 Juillet 1863.

JÉGOU, Vic. g.



DEPOSÉ :

J. H. Haslé

Moulet é Montroulez, é ty J. H. Haslé.